

AN DIZOLOADENNOÙ HA KAVADENNOÙ BRAS

Diell 1

E 1453 ez eo diskaret Konstantinopolis - impalaeriezh kristen - gant Turked an impalaeriezh ottoman - muzulmat. Stanket eo an hent d'ar rouantelezhioù europat kristen da vont da Azia hiviziken enta. Er XV^{vet} kantved, broudet ar c'hoant dizoleiñ hentoù nevez, gant ar c'hoant kaout pinvidigezhioù, e krog moraerion Europa gant ergerzhadegoù bras war ar morioù. Da gentañ emañ o soñj gant kavout hentoù nevez war-du ar Reter, an Indez ha Sina. Buan avat e teu anat dezho o deus kavet douaroù dianav dezho betek-henn. O mad o deus graet eus araokadennoù kalvezel ar merdeñ abaoe dibenn ar Grennamzer : suroc'h ha buanoc'h e oa ar bigi evit treuziñ ar meurvorioù.

Henricus Martellus a oa anv latinekaet Heinrich Hammer, un douaroniour ha kartenour alaman (*Nuerenberg*) a vevas hag a labouras e *Fiorenza* (Italia bremañ) etre 1480 ha 1496.

Diell 2

Afrika, war-du ar reter

Klask a reas ar voraerion da ergerzhout aodoù atlantel Afrika. Da geñver an ergerzhadegoù-se eo e tegemer Priñs Portugal, Herri ar Moraer, digant ar Pab, e 1454, an aotre da lakaat Afrikiz da sklavourion. E 1487 e c'houlenn Joao 2, roue Portugal, ouzh Bartolomeu Dias da glask un hent da vont betek an Indez. E deroù ar bloaz 1488 e tremen Dias a-vaez da gab kreisteiz Afrika, Kab ar Spi Mat e anv bremañ.

Dek vloaz war-lerc'h, e 1498, e tizh ar Portugalad Vasco de Gama, diwar urzh e roue Manuel 1^{an}, hag a drugarez da zizoloadenn Dias, Kalikat war aodoù kornôg an Indez. An Europad kentañ eo en gra dre vor. Padal en Indez (hag e Kalikat dres) e oa aet Arabiz ha Sinaiz endeo.

[Mammenn an diell roet d'ar skolidi : <https://www.plathey.net/livres/portugaise/velho.html>]

Diell 4

Menegiñ e oa bet lazhet Magalhaes pa felle dezhañ skoazellañ roue Enez Cebu (bet kristeniekaet gantañ) a-enep d'ur roueig bihan, ha pa gave dezhañ ne c'halle ket an henvroidi noazh-se stourm outo. Lazhet eo gant ur bir pistrus. Argaset eo ar voraerion a chom gant roue Cebu pa glev hemañ eo bet lazhet o fenn bras. [Da gontañ hervez oad ar vugale marteze : hervez Per Merzher a Anghiera (1457-1526) e oant bet argaset peogwir o doa palforset merc'hed an Enez. Roue Cebu en doa int lakaet da zoueed mes kavout a reas iskriv o doa an doueed « darempred » gant merc'hed.]

Beaj Magalhaes hag an Euskarad El Cano (a gasas an ergerzhadeg betek penn) a brou d'ar rouaned ez eo an Douar ur bellenn. Dizoleiñ a ra an dud, pa en em gavont d'ar 6 gwengolo 1522, an dislank euriou : gounezet o doa ar voraerion 24 eur war ar re a oa manet e Spagn (en Andalouzia e touarjont).